

« Kalz' so dezhi pardoned
 Dre m'hen deus kalz karet ;
 Eun deis e vezo guelel
 Etouez an Arc'heled. »
 Evit guir, guelel a reer
 Var an teil o tivoan
 Bokedou koant ha seder,
 Al lili ho-unan.

Santez Mari Madalen,
 Hor Patronez kared,
 Klevit breman hor peden
 Hag hon hentchit bepred.
 Ni ive' zo pec'herien,
 Goulennit hor pardon ;
 Ha ra vezo da viken
 Da Jezus hor c'halon !

Dioc'h tan an env, ar c'hlenved
 Diouallit hor buez ;
 Mes dreist-oll dioc'h ar pec'hed
 Ha dioc'h peb hudurnez
 Diouallit hor c'halonou ;
 Hag eun deis gant Jezus,
 Pa vezimp oll en Envou,
 Hor joa' vo hirbadus.

H. C.

Imprimatur
 Lambézellec, die 12 Nov. 1909
 A. GADON
 V. G.

Da Zantez Mari Madalen

Var don : *Guir vugale ar Verchez.*

Meuleudi d'ar Vadalen
 Da guenta pec'herez ;
 Mes deuit dre he finijen
 Ha dre he c'harantez,
 O veza kavet Jezus,
 Da veza ar c'haera skouer
 Eus trugarez burzudus
 Mab Doue hor Zalver.

Eun deis m'edo ar Messias
 Ouz taol eur Pharizian,
 Eur vaouez en he bleo noas
 A dosteas outhan ;
 Ha treac'hed gant ar glac'har
 Eveuz he fec'hejou
 En em strinkas d'an douar
 E kichen an Aotrou.

Slaga' ra he muzellou
 Ouz treid sakr Mab Doue
 En deveus gant he daelou,
 A zired puill neuze,
 Glebied ken na voent guelc'hed
 Ha seac'het gant he bleo,
 Ha gant kalz doujans skuilled
 Louzou c'houez vad varnho.



Dioc'h he guelel er stad-se
Ehars treid hor Zalver,
Ar Juzevien a zoueze
Heb kredi lavar guer ;
Dreist ar re all koulskoude
Unan, hanvet Simon,
Muioc'h-mui a ziskrede
E goeled he galon.

« Ah ! ma vije, emezhan,
Hennez eur guir Brophet,
Piou eo hounnez' zo ganthan
En dije mad gouezed ;
Ha n'en dije ket neuze
Lezed da douch oullhan
Eur bec'herez evelse,
Bruded ker fall aman !

O veza raktal lenned
E kalon an den-ze,
Ha diganthan goulnned
Pehini a dlefe
Eus a zaou zleour pardoned
Muia trugarekaat :
« Heb mar an hini' vefet
Great dezhan muia vad ! »

— « Mad ! eme neuze Jezus,
Daoust hag ar vaouez-se
Em eus dioc'h he stad mezus
Tenned, hag evit-se
En deus breman evidon
Brassa anaoudeguez
N'elfe ket rei d'am c'halon
Joa ha levenez ! »

E guirionez, me lar deoc'h,
E baradoz va Zad
Netra na laka muioc'h
An oll da laouennaat
Egued guelel ar pec'her
A ioa bet fazied
O tizrei, hag o kemer
Hent ar guir eürusted.

Hirio eta en Envou
Elez hag arc'helez
A gano meuleudiou
Eñ vrasa levenez ;
Ha dañlou ar Vadalen
Skuilled var va zreid-me
A roi sked d'he c'hurunen
Hed an eternite !